

# Kenvrois,

Ni a zo eneb CLOAREC hag he gamaraded.

Skuis gomp ganthè.

Dismegans a reont deomp, Kristenien Katholik en hor bro.

Digristenet o deus hor skoliou.

Kasset o deus ar seurezed eus an hospitaliou.

Ne reont nemet egasi ar veleien.

Tennet ho deus ar Grusifi eus an Tribunalou.

An dud a zo e servich ar C'houarnamant n'int ket lezet libr da heul ho religion.

En em gemeret a reont ous hon ilizou.

An dra-ma a zo re an oll.

Na reomp nemet eun INVANTOR, a lavar al lamponet

— Ia..... da c'hedall ma reot foar, laëron !!!

Lezen an Disparti a roio deoc'h al liberte — Nan, eme an Tad Santel ar Pab. Se zo geier. — Me zifen ous ar gristenien, va bugale, senti ous al lezen milliget.

Ar Fran-Masoned a lavar skler e lakint ho c'hra-banou loas var hon ilizou.

Guelet o vo se.

Da c'chedal, CLOAREC en deus votet al lezennou milliget-se.

CLOAREC a zo drebet he goan ganthan.

CLOAREC d'an traon ! CLOAREC er meas !

Plas da eun all, **da eun den leal**, da eun den a zoare.

Henor ha respet da Zoue ha d'an Ilis !!

Liberte d'an dud fur, d'an dud honest, d'ar gristenien.